

### An ivern

eun de pa voand e pourmen e pourmen assamblez  
ag int e tond a parlant deus ar briadelez.

mez siwas eun toll kruel a ra an disparti  
ar plac'h a deu da verval iaouank a dissouçi.

eun(1) den man p'an deus klevet voa mare (2) he vestres fidel  
en eum lakez er gouant e mesk an dud Santel

hag henon pede Doue noz a de  
evid ma velje choas e vestrez evel pa voa en bue.

eun nozvez voa en he velle kousket mad  
hag e teuas eur messajer evid-dond d'he kerhad

— Petra roïd- de dime ia en assuranç  
me a reï did goëled da vestrez eb na droug nag offenç

— me zo eur paour kez kabuçin ne meus ket a voiën  
nemed eur blatinen arc'hand lived en aour melen  
ag a roïn me dide ia en assuranç  
mar gres din goëll et va mestrez eb na droug nag offenç

kregi a eure enan neuze eb dalle pel  
a nijegal a re gantan dreïst an tie huel

harruchont en eun alle ag a voa hir meurbet  
ag er pen all anizi eun or vras ouarnet.

Dre ar nerz deus e gomzou an or a zigor promptamant  
pelec'h edo e vestres ! en eur gadeur ardant !

— Debonjour d'eoc'h va mestres c'houi o c'heus poan aman  
Seblantout a ra dime e maoc'h e kreïz an tan

— ia sur va chervicher, poan vras a souffran aman  
an tan dimeus an ivern ne cess dam devoran.

C'houi reï va gourhemennou dam c'har ar zo er ger chomet  
ag e leverot dezi beza fur a parfait.

Catherine Le Borgne de Laninor. Taulé, 3 mars 1851.

(1) *Ms : eun ; lire : an.*

(2) *Ms : mare ; lire : maro.*